

41/1 Br 107²⁹⁴ (X)
459 B

CHANSON NEVEZ

VAR

SUJET AR BREZEL

1929

Occupi ran va speret da gomposi eur chanson, (bis)
Ia, var sujet ar brezel, poan em beus em c'halon. (bis)

Da daouzec a vis gouere, er bloavez dec a tri-uguent,
E oa disclairiet ar brezel a enep ar Francisien.

Aboe an amzer-ze, calzic goat zo sculiet,
Bars e rouantelez Franç, graç da Vismark miliguet,

Ar Franç a zo consacret d'an Itron-Varia,
A Guillou, roue ar Pruss, a fel dean en distruja.

Neket dies dean ober, tout e maint en tu guanta,
Ar cheffou, ar re vrassa, zo deut d'on trahissa.

An Impalaër da guenta en deus trahisset ar Franç,
Hac an deveus meritet beza treutet gant eul lanç,

E bars e combat Sedan en devez capitulet
Pevar ugent mil soudart a zo ganta prisoniet.

Bazaine a zo eun traitour, en devez guerzet Metz.
En devez ive meritet beza fusillet mill guech.

Eur guer envel da ones biscoas neo bet kuemeret.
Ret voa coët gant Bazaine evit rei dar Prussianet.

Mac-Mahon on devoa courach n'a c'houle met combati
Mez dre urs an Impalaër e voa forcet da guli,

Var dachen ar brezel Mac-Mahon zo bet blesset,
A zo bet casset d'ar Pruss gant e oll zoudardet.

Breman Mac-Mahon zo prisonier gant bismark Milli-
Me gred, dre c'hars Doue e vezo delivret. | guet

Goud a ramp, abaoue, ez int bet delivret,
Nimp a vezo trec'h neuzet don oll ennemiet.

Bismark a zo eu lapous hac a zo hir e fri,
Mez birviquen bars e Franç ne deui da gommandi.

Evitan da gaout speret ive cals talent,
Mar zigouefe dont da vervel an oll eve contant.

Ar Prussianet cruel, cruel evel tigret
Laza reont ar vugale, ep respecti ar merc'het.

Bombardet ho deveus Paris, e man en tan en goad,
Tout vezo distrujet siousas ho pebeus kalonat.

Doue en devez preguetet, a de c'her ne vanko ket,
Ar Franç a zo orgouillus, a rank beza humiliet.

Ar brezel zo eur voalen evit ar Francisien,
Evit o forci pelloc'h da ober piniñen.

Guere'hes sacr a Rumengol, patrones ar Vretommet,
Preservet or soudardet pa vezint ezposet.

Preservet or soudardet pa vezint exposet,
Pa zistroint dar guer e zaïnt tout d'ho guelet. K

Patronez euz ar forest, guere'hes vad Izelvour.
Kals martolodet a zo ho c'houten ouzoc'h sicour.

Preservit a-neo var zouar hac ive ar mour,
Neo ket ar vech kenta e vec'h deut do sicour.

Patron er bares-ma, Aoutrou Sant Per beniguet,
Pedi brema, ni o ped. evit or zoudardet.

Bhoui Itron Santes Anne, patrones eus ar c'hanton,
Quemeret or zoudardet didan o protection.

A da zeves o pardon e zaïnt tout do pedi,
Gant pep a choulaouen goar d'ober en dro d'hoti.

Ar Franc dre chrac ar Verches a vezo victorius
Rac pel zo eo consacret da Galon-Sacr-Jesus.

Mer e fel deoc'h gouzout, a gouzout a clevet
Gant piou e zeo ar chanson a nevez composet.

CHANSON NOUVELLE

VAR

SUJET AR BLA 1870

Ann
139

13 *Domine probasti me, neque me secunda :*

12-13 Me hoped^o va Doue, dont d'am sclerijena,

13 Ma composin eur recit, vit ar bla zo o rên,

13 Pehini lac tristidigues var bue meur a den.

Evit rei dec'h da entend a pes zo erruet,

14 Er bla dec'a tri-uguent goude an trivec'h canvet,

Ne quet dec a tri-uguent goude an trivec'h cant,

12 Zo bet predesfinet gant an Oll Buissant.

Da veza evit ar Eranc eur voalen a gastî,

12 Hac accomplisset eo camzou ar prophecî :

12 Deut eo ar goat amzer da rên en hon mescou,

15 Pehini a lak tristidigues en nombr a galonou.

Commançamant ar bla e zeus bet eur c'hlenvet

Pehini n'eus gret distrui en mesk ar Vretommet

bete ann de hirio, e pad ar c'hlenvet-se,

Hanvet ganomp ar vrec'h ebars en hor c'hontre.

Hac epad an anvou e zeus bet, eur sec'hor

En cals a vellinou zo c'avet dor digor,

En defot da gavet dour evit mala an ed,

Cals dud a zonje de e vijent perisset.

Hac a ben fin ar sec'hor, ar brezel commencet
Entre rouentelez Franç hac ar Brussianet,
Pehini n'euz laket Franç en tristidiguez :
Deut eo an enemiet var ar rouentelez.

Ar c'henta deiz a viz east, Napoleon tride,
En e zirection, er pen euz e arme.
Vit mont da gombati eus e euebourien.
Var bord rivier ar Rein, kichen Mess, en Loren.

Ar general Mac-Mahon, ar general Douai,
Assembles gant Napoleon o deus bep a arme,
Vit mont da gombatti eus o ennemiet
Hardi ha courajus gant teir arme gompлет.

Eno epad tri devez eo bet tom ar barti,
Hac an ennemiet deuz renket reculi ;
Et int bet evel laeron, entreet bars er c'hoat,
Elec'h ne voa nep moyen da livra de combat.

Ar general Mac-Mahon en deveus lavaret :
Lakat an tan er c'hoat hac e vijent devet ;
Mes an Napoleon, eun den a galon vad,
Ne bermetge biken lakat an tan er c'hoat.

Sonjal a re dezan dont a ben anezo,
Biscoas n'er deveus heuliet hent ann trahisono
Racombatet en deus bepret gant vaillantis
Dre oll e lec'h meo bet, er mes eus a Baris.

Ar brussianet fal abaoue pemp bla zo.
E voa o exerci tud evit an armo.
Hac int deuet dustu oll ar Francijen,
M'ho deus renket cedi a quitat an dachen.

Neuse an Ampereur en deveus bet scrivet
Da zaou ar vaillanta deus e generalet ;
Da zonet d'e sicour gant diou arme gompлет,
Pe n'em renta en Strasbourg, en deou da zonet.

Mes an daou general o c'heuil trahizonou,
Elec'h ne voa ket ezom a bozas o armou,
O chom eb e sicour, impi ha disleal,
O deveus discaret an tron imperial.

En defot da gaout tud e colas an armou,
Rac ar Brussianet voa cals mui evit-ho,
Hac o deveus er c'hreis anezo dastumet.
Casi evel eul lapous ebars en eur gaouet.

A greis m'oa an Ampereur dastumet evel-se,
En guellet eur messenger o tennet d'e vete,
Da rei dezan lizer voa scrivet magnific.
Vit lavaret e Paris a rene ar Republic.

Neuze an Ampereur en deveus lavaret :
« N'on mui mest da netra, erves a meus clevet ;
« Couls eo din en em rei, a beza prisoniet.
« Evel eo mont da Baris da veza trahisset. »

Cals a dud zo en Franç, a lavar gouscoude,
En deus an Ampereur hon trahisset ive,
Evidon-me va hunan, na gedfen birviken,
Ve bet capabl d'ober eun dra ken inhuman.

Breman ar Republic en deveus ordrenet
Ma vije exercet an oll citoyanet.
D'eus eur bla var-n'uguent betec anter cant vla,
Vit ober exercis pep sull da nebeuta.

Deus ar gard sedenter zo bet dispartiet
Betec daou-uguent vla ar gard mobiliset.
Da bartiet ive evel ar re guenta,
A quita deus brô vit difen ar vro-ma.

Guelet ar gard mobil quitat deus o brô
A zo bet evidomp ive eur goal guelou,
Mes guelet tud yaouank e voa bet exantet,
O quimiadi diouzomp, zo tristoc'h da velet

Dre all dre ar Franç eo fall ar c'hömmerçou,
Netra na c'honezer evit bale ar vro,
Hac ar paour ques merer gant e gomm anapchou,
Penos c'hello ober evit pea e fermou.

Partiet e vugale hac e dud eus ar guer,
Al loenet marc'hat mad na netra na verzer ;
Amzer an distridigues evit ar baysantet,
Biscoas eur sort amzer n'hon ni deveus guelet.

Pedomp-ni Bretonet, pedomp evit hor bro
Ha vit soudardet zo dindan an armo,
Hac ar re zo er Pruss evel prisonnierien,
Faminet gant an naon ha gant ar venien.

An hini neus composet ar recit a neve,
A zo apavezet bars en meur a gontre,
En deveus hi rimet d'an de diveza ar bla,
Poa an nerc'h var an douar ; amzer avoalc'h en dva.

Ar pez a zeziran en fin va c'anahouen,
Ma vezo ar victor evit ar Francijen,
Ha pa vezomp en peoc'h hac en dranquillite,
D'en em rejouissa an eil gant eguile.

Mar fell deoc'h gout ar c'homposer,
Ganet eo e Loqueffret, ha mab d'eur miliner,
E ano François Rolland, var cayerou e vro,
Ha pa sin e-hunan, beza Rolland eo e ano.

A zo bet er studi e Ploëmel ive,
En amzer-ze voa ar Franç bars en tranquillite,
Ha pa zeo distroet n'eus disket eur vicher
Anezan e hunan beza horolacher.

